

Jaffrennou (Taldir)

Teatr Brezoneg Pobluz

Karhêz. Moullerez ar Bobl. (1911)

Taldir, Jaffrennou, bet ganet e Karnoed e 1879, marvet e Bergerac e 1956.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Tennet eo ar pezh-c'hoari-mañ euz al leor

Teatr Brezoneg Pobluz Karhêz. Moullerez ar Bobl. (1911)

Embannet e oa bet al leor-mañ e Karhêz gand moullerez ar Bobl (kelaouenn Taldir), ha war eun dro e Pariz, e ti Champion.

Al leor-mañ a zo kinniget

D'an Aotrou Emil ar C'hloareg

Mêr Plouian, Kannad Montroulez er Parlamant.

An *Teatr Brezoneg* a oa kouezet en e boull, pa adsavas an Aotrou Ar C'hloareg eur strollad en Plouian. Homañ a roas eun displegadenn gaer-murbed a Vuhez Sant Gwenole, ar Sul 14 a viz Eost 1898. War an heveleb tro e oe krouet *Kevredigez Broaduz Breiz*, ar genta vreuriez a spered breizad.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Levezonet eo Taldir gand ereadurez ar galleg. Da skwer e skriv :

war an daboulin-mañ

C'hwi a hallfe, Itron, eur pennad azeza,

pa vefe e brezoneg mad :

war an daboulin-mañ

E hallfeh, Itron, eur pennad azeza,

Implijoud a ra ivez geriou galleg brezonekaet gantañ.

Iskiz-kenañ eo ar pezh-mañ. Ma soñje Taldir evel ma skriv er pezh-se, n'eo ket mad evitañ, pell a zo !

Eur votadeg giz-nevez

Choarieren

Laouig Morissot, depute koz Pontanezen.

Audifred, war ar reñk evid ar Re Wenn.

Hubert Polinof, war ar reñk evid ar Re-Ruz.

Jul Ar Sourmer, mêt Penn-an-neh

Herbot, kabaler Audifred

Elektourien

Arvest I

An teatr a ziskouezo eur blasenn.

Kevrenn I

Laouig Morissot a erru war an teatr gand eur valizenn en e zorn kleiz ; eur vaz en e zorn dehou ; eur horn butun en e henou. Koz eo. Poz a ra ar valizenn war an douar.

Ar bemped gwech eo din da ober ar stourmadenn elektoral ! Ar bemped gwech eo din da zond da houlenñ moueziou digand lodenn-vro Pontanezen.... C’hwezeg vloaz ‘zo o-deus kaset ahanon da Bariz... Ar bloaveziou-ze a zo tremenet re vuan, allaz ! Koulskoude, laouen on deuz ar pezh am-eus greet, rag bepred on bet euz tu ar Gouarnamant. Viv’ la sort¹ ‘zo, eo bet atao ma lezenn. Êsaet am-eus kontanti ar Republik en Pariz, en eur voti he lezennoù ; em farroz, e kontantan ivez ar Person, en eur lezel ma gwreg d’ober he fask hag en eur rei o hest d’an dud a Iliz. Evel-se e tapan daou benn ar vaz. Ha memestra, da beb vot, en despet d’am bleo gwenn – eul louarn koz ahanon – ar wall blanedenn am-eus da gaoud bepred daou pe dri o stourm diouzin. Ar revolusierien a-gleiz, ar chouanted a-zehou, en em glev meurbed evid sevel a-eneb din, ha ma lakaad da zispign arhant en droug prepoz... Beteg amañ am-eus gounezet warnezo, gand lakaad daou vloaz euz ma fae da ober an eleksion (*en eur zevel e zivreh*) tregont mil lur !... Eüruzamant on-beus gouvezet an tu da ziarbenn eun tammig bihan kernez ar votadegoù en eur gas on homanant da 15.000 lur beb bloaz.

Sell... Just a-walh eo erru ma mignon an Aotrou Jul ar Stouper. Hemañ ‘ma oll ganton Penn-an-Neh etre e zaouarn... Groom min flour dezañ... Kaoud a ra dezañ e tapo ma hador eur wech bennag...Fazia ‘ra... Me ‘zo reud c’hoaz.

Kevrenn II

Morissot ; Jul ar Stouper (*aotrou yaouank*)

Demad deoh, Aotrou enoruz Morissot. Ha mad ar bed ?

Morissot

Na petra ‘ta, ma mignon ker : n’ema ket ar mare din da chom klañv.

Jul ar Stouper

War an oad ! Me a dalvez c’hoaz meur a zen yaouank evel-doh, erru war an oad...

Morissot

War an oad ! Me a dalvez c’hoaz meur a zen yaouank evel-doh, Aotrou Stouper.

¹ Viv’ la sort : ?

Jul ar Stouper

N'eo ket se 'laran ; mez gouzoud a rit ho-pezo c'hoaz daou gandidad da eneb ouzoh.

Morissot

Adarre, ma Doue !

Jul ar Stouper

Ya, unan ruz hag unan gwenn.

Morissot

Arsa ! tristidigez an douar-mañ. N'eus ket an depute eun tamm plijadur. Na pebez dispign evidon c'hoaz.

Jul ar Stouper

Eun netra. Tregont mil lur bennag.

Morissot

C'hwi 'ra netra gand 30.000 lur !Daou vloavez euz ma homanant !

Jul ar Stouper

Red eo dispign pa doucher.

Morissot

C'hwi 'velkent, aotrou Stouper, a gabalo a-du ganin ?

Jul ar Stouper

N'ouzon ket.

Morissot

Ho poan a vo talvezet deoh.

Jul ar Stouper

Pegement ?

Morissot

Pemp mil lur.

Jul ar Stouper

Galvet on d'ar gêr. Kenavo arhoaz, aotrou Morissot. Aon am-eus evidoh.

Morissot

Seiz mil...

Jul ar Stouper

Erru eo tost da greisteiz : poent eo din mond.

Morissot

Deg mil...

Jul ar Stouper

Bremaig e vin skandalet gand ma gwreg... Alo, kenavo. (*Astennn a ra e zorn da Vorissot*).

Morissot

'N an' da Zoue, gand daouzeg mil lur 'vid se...

Jul ar Stouper

Arsa, biskoaz ! Goud a-walh a rit na labouran ket evid arhant. Koulskoude pa zalhit...

(Morissot a ro dezañ daouzeg billed a vil lur).

(Morisset a dap e valizenn, hag a ya kuit gand Stouper dre eun tu).

Ar votadegou giz nevez... Allaz ! Allaz !

Kevrenn III

Audifred ; Herbot

(a erru raktal dre an tu all, pres warnezo).

Herbot

(o frota e zaouarn)

Alo, Audifred, ma mignon Audifred, joa a ra d'am halon gweled ahanout war ar reñk ! Ro din eur pok...

(Poka a reont an eil d'egile).

Audifred

Te 'zo sod.

Herbot

Totohod.

Audifred

Komzom siriuz. Hag ar votadeg ?

Herbot

Sur out da dremen. Tremenet out ha toud.

Audifred

Sant Tremen, pedit evidon.

Herbot

Gounid a ri.

Audifred

Charivari.

Herbot

Din-me da lavared : komzom siriuz.

Audifred

Kousta 'ra ker ar votadegou : dija zo eet pemp mil lur diganin na ouian ket peleh, ma Doue.

Herbot

Petra eo se ?

Audifred

N'eo ket te a bae.

Herbot

Ar viktor a zo er penn : kourach ! Ar gostezenn dehou a zo en he sao evidout. Bez soñj ah-eus an enor da zougen banniel didarch ar re wenn. Kourach, Audifred.

Audifred

Te 'lavar gwir, fri hir.

Herbot

A-brepoz, ha da brogramm ?

Audifred

'Oan just a-walh o soñjal penaoz ober anezañ.

Herbot

Greom anezañ asamblez. Me 'gomañs : « Elektourien Pontanezen... »

Audifred

« Elektourien Pontanezen... »

Herbot

« Me 'zo eun den eveldoh... »

Audifred

A-dra-zur n'on ket eur marh.

Herbot

Zut ! Ganit e vez bepred evel-se.

Audifred

Flut, warhoaz e vo echuet ar program. Ro peuh ! erru eo an aotrou Stouper dre amañ.

Kevrenn IV

An heveleb re. Stouper

Audifred, Herbot, *o tenna o zokou, hag o stoui izel.*
Deboñjour, aotrou Stouper

Stouper

(fuloret)
Deboñjour.

Audifred

Eur ger, mar plij, aotrou Stouper.

Stouper

Petra 'zo evid ho servich ?

Audifred

Nebeud a dra... Eur ger berr... eun tamm harp...

Stouper

A ! Ya !

Audifred

Me 'zo war ar reñk evid ar vot disul.

Stouper

Pebez follentez !

Audifred

An dud a lavar din on sur da baseal.

Stouper

Gwell a ze evidoh.

Audifred

Me 'gred, aotrou, ne vefet ket 'eneb din.

Stouper

N'ouzon ket.

Audifred

Marteze e hallfem en em gleved.

Stouper

Diêz e vo.

Audifred

Pemp mil lur.

Stouper

Evid piou e kemerit ahanon, aotrou ?

Audifred

Ho tigarez.

Stouper

Koll oh.

Audifred

Seiz mil.

Stouper

Kenavo.

*Audifred a grog en lost e livitenn hag Herbot en lost livitenn
Audifred hag e sachont an eil war egile en eru ober tro an
teatr. Ar Stouper n'hall ket dizamma dioute.*

Audifred

Eiz mil...

Stouper

Biken.

Audifred

Nao.

Stouper

Biken.

Audifred

Deg...

Stouper

Ayou ! ma Doue ! C’hwil ‘zo gouest da fêza eur marh.
(*Torcha ‘ra e hwezenn gand e vouchouer*).

Audifred

Sed aze deg billed... Eun taol skoaz, netra ken.

Stouper

Galloud a it beza dineh... Alo, kenavo ; tost eo da greisteiz,
ha ma gwreg a skandal... Kenavo.

Audifred

Ha mersi !
(*Stouper a ya e-kuit*).

Herbot

Eun taol brao, hennez ! Gounid ar Stouper ! Ar wech-mañ
‘vad out e-barz.

Audifred

Lakaet e-barz gantañ.

Herbot

Petra ‘fell dit ? Deom bremañ da ober eur programm kaer.
(*Partial a reont*).

Kevrenn V

Dre an tu all e tered eun aotrou treud, bleo hir ruz dezañ : e
zillad a zo freget ha kaillaret.

Hubert Polinof

Haker Ble² ! Darbed eo din tapoud ar forh em zu-gin gand al
loened gouez-se... Ya, komprenit e oan eet da ober eur
brezegenn da vourh Bothaleg, diwar-benn partach an traou.
Eun toullad chouanted, isistet gand o gwragez³, a zo deut
war ma lerh ha gwall vloñset ahanon. It da gemer poan gand
an dud-se !... It da sklêrijenni ar goed-se⁴ ! Fest ar vaz ho
kortoz.

Kevrenn VI

Polinof, Stouper, a dremen.

Polinof

² Haker Ble : ?

³ isistet gand o gwragez : pouezet warno and o gwragez.

⁴ ar goed-se : ? Marteze ar re a zo e go.

An Aotrou Stouper ! Demad,Aotrou Stouper.

Stouper

Sell ! C’hwi ‘zo amañ ? Hga e stad-ze ?

Polinof

... O tisrei deuz Bothaleg. Bothalegiz o-deus lakaet ahanon er stad-ze.

Stouper

Neuze oh kandidate !

Polinof

A-dra-zur.

Stouper

An dra-ze ho tesko.

Polinof

Na ‘vid-ze e tremenin.

Stouper

Poan am-eus o kredi.

Polinof

Eo ! Ar bobl a gomañs hija he mouenn... Ar bobl a gomañs teuler ar habestr, ha dond d’ar re a labour evid heh interest.

Stouper

Ya, evel en Bothaleg.

Polinof

Ouvrierien ar hêriou a zo speredekoh. En Kernetra on bet douget gante.

Stouper

Douget er-mêz !

Polinof

An ideïou nevez a vo treh.

Stouper

N’eus netra nevez dindan an oabl. Me ‘zo sur oh koll.

Polinof

Penaoz ‘ta ?

Stouper

Dre ma rit an eleksion gand geriou kaer hepken. Soubenn vijil !...

Polinof

Petra faot deoh ? Ma arhant n’eo ket stank. Gand eiz mil lur eo red din c’hoari.

Stouper

Kalz re nebeud.

Polinof

Bolontez vad 'zo. Mar dremenan, m'ho tigollo, Aotrou Stouper.

Stouper

Ar pae goude 'vo lahet ar bleiz. Ha mar veh lahet ganatñ !

Polinof

Komzom frêz, hag e vim êz. Sikourit ahanon hag on kontant da rei mil lur deoh, dre ma'z oh eun den selaouet er hntre.

Stouper

Goapaad a rit evid eur sosialist eh oh. Eiz mil lur 'zo en ho kodell, hag hoh-eus an tal⁵ da ginnig din mil aneze...

Polinof

Daou !

Stouper

Tri n'eo ket beza direzon.

Polinof

Dalit ! Setu tri aze. Mez gwaskit war ma zu, hañ !

Stouper

Bezit asur e waskin, ha stard.

Polinof

Neuze, kenavo, sitoaian. 'H an da vond. C'hoaz em-eus da ober en deg devez naonteg koñfereañs ha pevar-ugent. Koll a rin ma mouez o sklêrijenna ar bobl...

Stouper

Kenavo, sitoaian, ha chañs vad.

(Mond a ra kuit)

Kevrenn VI

Stouper (*e-unan*).

Daouzeg mil lur digand Morissot ; deg mil lur digand Audifred ; tri mil lur digand Polinof ; etre toud : pemp mil lur warn-ugent.

... Ahanta, n'eo ket fall ar stal. Bremañ, evid pehini anezo e labourin ? Setu-me nehet a-walh.

(Ober a ra eun dro bennag ha mond a ra kuit).

Arvest II

An teatr a ziskouezo eur zal bennag, hag eul leurenn-bleñch er penn all anezi. War al leurenn-bleñch ema azezet :

⁵ hag hoh-eus an tal : galleg.C'hwi a gred...

Audifred, Polinof, Herbot ; er hreiz, Ar Stouper. Dirag al leurennig-teatr, pemp pe hweh den a zisklêrio ar Zelaouerien.

Kevrenn I

Ar Stouper, *en e zao.*

Ar seañs a zo digor

Elektourien Pontanezen :

Disul oh galvet da zibab eur hannad da gas da Bariz evid divenn ahanoh e-pad pevar bloaz. Tri gandidad a zo war ar reñk, ha pedet o-deus ahanon, evel mêr parrez Pontanezen, da ren ar seañs-mañ, en hini eh aint da gemer ar gomz an eil war-lerh egile, ha da zisplega diragoh ar programm ruz, ar programm gwenn, hag ar programm glaz.

An oll

Brao ! Brao ! Viv' la sort 'zo !⁶

Stouper

Goude m'o-devo kaozeet ar gandidaded enorabl-mañ, ar gomz a vo roet ganin d'ar re o-devo eun dra bennag da zislavared. Rag-se, peoh e-pad an diskouriou. An Aotrou Polinof e-neus ar gomz.

Polinof

(O sevel hag o hijal e vouenn rouz).

Sitoaianed

Setu amañ programm ar Sozialisted, d'ar re⁷ on den ! Mar ben anvet ganeoh, setu amañ gand pesort mennoziou e lakain ma foan : Labourad a rin da vihannaad an ignorañs en eur groui eur mestr-skol evid pep tiegez ; da vihannaad an dienez en eur rei arhant d'an oll dud ezommeg. Peleh e vo kavet arhant ? El leh m'ema, en koufr-houarn ar re binvidig e tapim anezañ.

An oll

Brao ! Brao ! Viv' la Polinof !

Polinof

Ar re binvidig o-deus kalz re : tennet e vo digante evid rei d'ar re n'o-deus ket. Lakaet e vo ivez taillou pounner war al leveou, an taillou-mañ a yelo war greski dre ma kresko an êz. Leh ne vo nemed unan pe zaou a vugale, e vo doublet ar frejou kantved-diner ; ar zoudarded na reont netra, lakaet e vint da ober hentchou braz ; er hêriou e vo savet tier da loja evid netra an dremenidi hag ar veajourien ; da zaou-ugent vloaz, pep hini a doucho eur retred a vil lur ar bloaz ; lakaet e vo en komun ar mengleuziou glaou-douar, an asurañsou, hag an hentchou-houarn, hag ar benefis a vo lodennet etre an oll ; ar verourien a vo lezet gante ar mereuriou evid netra goude an nao bloaz kenta feurm ; erfin, ar merhed a vo roet droad deze da voti koulz hag ar baotred.

⁶ Viv' la sort 'zo ! : ?

⁷ d'ar re = da bere, er skrid orin.

Setu eno ar programm socialist, an hini a raio eürusted an dud war an douar.

(Azeza a ra)

An oll

Viv' la Polinoof !

Stouper

Den ne houlen ar gomz ? Neuze ar gomz a zo d'an Aotrou Audifred.

Audifred

Mignoned,

Me a zeu da houlen ho mouezioù diganeoh en ano kostezenn ar Roue. Ar Frañs heb eur Roue a zo eur horv hep penn ; gand eur Roue, eur politik a beoh a reno, hag ar furnez a vo lodenn an oll. Ar relijion a rank beza enoret ivez en on touez, mar fell deom beza eüruz war an douar ha gounid diwezatoù ar baradoz. Enebour e vin d'ar republikaned a zo bugale an diaoul ; lakaad a rin an traou da vond war o zu mad, evel ma'h eent gwechall en amzer goz, pa rede dre oll sterioù lèz dous, ha pa zebre ar hi hag e vestr er memez skudell.

Erfin, evid diskouez ma bolontez vad, me 'houlenno ma vo degaset pae an deputeed da eur gweneg bemdez, evel hini ar zoudarded, ha ma vo lakaet en amand ar re na zeuint ket d'ar Gambr da bep tro.

Beza 'vin aketuz da zerviji bihan ha braz, lard ha kraz ; den e vin d'an oll, ober a rin e feson ma veh eüruz oll war an douar hag er bed all goude ma veh maro.

(Azeza a ra en eur dorcha e dal).

An oll

Brao ! Brao ! Viv' la Audifred !

Stouper

Piou a houlen dislavared ? Den ebed ? Ar gomz a zo neuze d'an Aotrou Morissot.

Morissot

Aotrounez,

Anaoud a rit ahanon pell 'zo. Me 'zo glaz ; anvit ahanon c'hoaz, hag e vin kontant-braz. Neuze e vo deoh ar rest euz ma buhez.

An oll

Brao ! Brao ! Viv' la Morissot !

Stouper

Piou a houlen komz ?

(Trouz ebed).

Lezit ahanon neuze da lavared eur ger.

Morissot

(en e skouarn).

A-du ganin !

Audifred

Brallit war ma zu.

Polinof

Pouezit war ma hostez.

Stouper

Elektourien Pontanezen :

Me 'gred n'oh ket akord war ar choaz da ober disul, ha me 'm-eus c'hoant da zikour ahanoh da zirouestla eur gudenn hag a zo luziet evidoh. Kaerra tra 'zo war an douar eo ar frankiz, ar vreudeuriaj, hag an heñvedigez ! Evid ma vo laket an tri ger-ze en praktik war douar Pontanezen, elektourien, n'ho-peus nemed eun dra d'ober...

(Peoh)

... Voti evidon, voti evid ar Stouper.

Morissot

Treitour afrontet.

Audifred

Trubard digalon !

Polinof

Gaouiad divergont !

Stouper

Me ho ped, ma mignoned kêz, lezit ahanon da gaozeal. Penaoz e rin-me da akordi ahanoh ho-tri, ha da zinehi an elektourien, ma ne gemeran ket an hent-se !

Morissot

Ha ma daouzeg mil lur ?

Audifred

Ha ma deg mil lur ?

Polinof

Ha ma zri mil lur ?

Stouper

Gwir a livirit ! Touchet am-eus 12.000 lur digand Morissot ; 10.000 lur digand Audifred ; 3.000 lur digand Polinof. Total : 25.000 lur. An arhant-se n'am-eus ket laeret anezañ. Roet ho-peus anezañ din a galon vad, evid dispign en hoh ano deoh ho-tri.... Me a bromet deoh derhel d'am ger : dispignet e vo hoh arhant e-touez an oll elektourien beteg al liard diweza hag ar re-mañ ho pennigo da viken...

An oll

Brao ! Brao ! Viv' la Stouper !

Stouper

Perag oh fachel, Polinof, mar doh eur gwir bartajour !... Perag oh yenet, Audifred, mar doh distag euz madou ar bed-

mañ ?... Perag oh droug-kontant, Morissot, pa'z oh c'hwezeg vloaz 'zo en Pariz, ha p'ho-peus touchet er heid-se kant mil lur pe ouspenn ?...

An oll

Brao ! Viv' la Stouper.

Stouper

Evid ho lakaad akord, en em brezantan ma-unan !

Morissot

(o sevel)

En ano pesort kostezenn, mar plij ?

Stouper

En ano ma hostezenn ma-unan. Ma frogramm, setu-eñ amañ : Ober dez ma teuio ; pa vo glao, kemer paraplu ; pa vo heol, tok-plouz ; pa vo avel, mantell ! Komprenet eo ?

An oll

Ya ! ya ! Brao ! You ! Viv' la Stouper, on depute nevez.

*Morissot, Audifred, Polinof, a ya evid sailled gand kolierou Stouper, mez ar bobl a heurt anezo, pevar gwaz a grog er Stouper, hag a zoug anezañ war o diskoaz en eur hopal :
You d'an depute nevez !*

Kevrenn II

Morissot, Audifred, Polinof, Herbot

Chom a reont mantret eno, o divreh laosk gante. A-benn eur pennad, Morissot a laka eur vreh en-dro da houeg Audifred, eben en-dro da houeg Polinof ; Kana 'reont war don "Ora pro nobis" :

Ma mignon Audifred ! Ma brank koz Polinof !

Audifred

Ma homper Morissot ! Ma henderv Polinof !

Polinof

Ma hamarad Audifred ! Ma breur Morissot !

Morissot

Na pebez gwalenn !

Audifred

Na pebez planedenn !

Polinof

Na pebez anken !

Polinof

Petra da ober ?

Audifred

Petra da zoñjal ?

Polinof

Petra da lared ?

Morissot

Kenavo arhant !

Audifred

Nijet ar peziou !

Polinof

War-lerh ar moni !

(Peoh eur pennadig).

Herbot

(e viz war e dal)

Aotrounez, arabad e ve koll kouraj. Ar moueziou ‘zo kollet, an arhant n’eo ket. Setu amañ petra ho-peus d’ober evid adhounid kement ho-peus dioueret...

O-zri

Komz buan, Herbot, ‘n an’ da Zoue !

Herbot

Mar am hredit, e-leh êsa mui mond da Bariz, c’hwi a grouo etrezoh ho-tri eur strollad teatr evid mond da hoari dre ar vro ar pez-komedi brezoneg :

Eur votadeg giz nevez.

En berr-amzer me warant deoh e hounezfet ho pemp mil lur warn-urgent !!

(Ober a reont beb a fri⁸)

⁸ Ober a reont beb a fri : galleg.

